



KANAOUEN AN DURZUNEL

Cals amzer a meus kollet
 O furchal a c'hoajou,
 « Vit surpren eun durzunel
 Kousquet var a brankou
 Devet a meus ma amors,
 Ha tennet a meus fall,
 Achapet an durzunel
 Ha nijet er c'hoat all,

Dious an noz hag ar mintin.
 O klevet lapousset
 O kana, e fredonin,
 Da vek ar gwez pignet,
 Na neus nikun anezo
 Hag a bik ma c'halon.
 Evel mouez eun durzunel
 O wela de mignon.

Hirvoudin a ra noz d'e
 Gant ar boan ar glac'har,
 Evel eun intanvez paour
 Kollet ganti e far,
 Ma neus nikun enezo
 Hag a kik ma c'halon,
 Evel moez eun durzunel
 O wela d'he mignon.

Petra durzunel yaouank,
 A dourmant d'ha c'halon ?
 « Kollet a meus, emezi.
 Ma fidella mignon.

Ma ne zo chasseur
 Da ober d'in mervel !
 Me varvo gant a glac'har
 Da va mignon fidel.

« N'eus na zoutent, na remet
 Na consolasion,
 Kapabl da zont da galmi
 Tourmanchou ma c'halon
 Trec'hed oun gant ar glac'har,
 Mont a ran da vervel
 Mez na varvin ket kontant.
 Ma na varvan fidel.

Guelet a meus o vervel
 An durzunel yaouank
 Dizec'het ma c'halon,
 Gant ar boan ann tourmant,
 Enn he c'huanad diveza
 Enn deus c'hoas repetet
 « Ha ma mignon fidel
 Raktal eo tremenet.

Melezour scler ha brillant
 Demeus a fidelite.
 Ar model ar sinseran
 Demeus ar garante,
 Nan, na varvin ket kontant
 Ma na varvan fidel
 Birviken na sizonjin
 Maro ann durzunel.



CHANSON AR BONOMIC

CHANSON NEVEZ

1^{er} Couplet

Debonjour deoc'h, Jeannedic,
Debonjour a lavaran c'han-c'han.
En pelec'h he ma ar bonomic,
Paneman o toma c'han-c'han.

2^e Couplet

Ema duze el liors o c'havessat an ed
Men a gret, o c'havessat an ed ;
It-thu hardi de gaout,
Ha no refuso quei, me a gret.

3^e Couplet

O bonjour deoc'h Bonomic,
Bonjour a lavaran c'han-c'han,
Ho merc'h evit ar fortun
Ganeoc'h e c'houlennan breman.

4^e Couplet

Ho nan ! va merc'h Jeannedic
Na zimezo quei c'hoas evit c'hoas,
Chom a rei, eun daou pe tri bloas,
Da roulan eb at c'hoas evit c'hoas.

5^e Couplet

Keus a pezo, Bonomic
Dam beza refuzet, me a gret
C'houi a zeuio de c'hinig dime
Ha me ne c'homerin quei, ne ring quei.

6^e Couplet

Clasquit o sac'h, den yaouank
A laruit-han var ho scoas, ya-da,

Quer kouls e eoc'h e gaout
Er bloa-ma e vel e gaout da vloas.

7^e Couplet

Var ben eis de da c'houde
Jannet zo chomet clan, va clan.
Ma commaes ar Bonomic.
Dont d'en em chagrina c'hau-c'han.

8^e Couplet

Neuze e ya ar Bonomic,
Da fouetta bro c'ho-c'ho.
Da glasq Fanchic da Jeannedic,
Evit an dimezi c'hoas evit c'hoas.

9^e Couplet

Lavaret he moa deoc'h, Bonomic
O piije va c'hlasquet, hac abred,
E teujoc'h de c'hinig dime,
Ha me ne c'homerin quei ne rin quei.

10^e Couplet

Brema e teu Jeannic.
Da gaout Fanchic, meve c'hoas
Da c'houlen eur bouch gantan,
Evit an disparti, c'hoas evit c'hoas.

11^e Couplet


Ho ya evit eur bouch, na daou,
Nag ive tri pa eo c'hui,
Ha mallos d'ar goal deoudou
Zo caos don disparti, ha hini.

FIN.



CHANSON

Ar Souben Les-Guin-Ardant



En eur gommanç canan, excus a c'houlennan
 Digant kement hini a zo presant aman.
 A beurs eun oac'h yaouank, din a oa ordrenet
 Rei dean souben les, nos kenta he euret.

Mes en lec'h souben les, me rei d'ac'h da danvad
 Malaga ha Champagn, liqueurio dilicad
 Biscoas ne oa evet sort gante bars ar vrø,
 Me meus gret ho digaç express deus a Vordeaux.

Na neus prinç, na baron, roue, nag ampereur
 A guement ma nefe tanveet ma liqueur,
 Pa zon deuet express evit ho regali
 An tanva kenta a so d'ho pried a c'houi.

An eil tanva a zo d'an daou zen a henor
 A neus ho conduet eus tol hon Redemptor,
 An drede tanva nei so do mam ha do tad,
 Pere a neus glac'har ho tonned do couitad ;
 D'ar bevaret a bedan breudeur a c'hoarezet,
 Kement hini ho car, querent ha mignonnet.

AR PES SO AMAN VOAR LERC'H A VE PROPR DA GANAN EUS TOL DA EUN EURED

An devez a hirio, pebes contantamant,
 Guelet an diou famill, ha kement so presant
 Aman nem assamblet gant cals a garante,
 Diredet oll gant joa d'henori an dud neve !

Na gredant quiet a ve den er gompagnunez
 A guement a nefe nep sort tristediguez,
 Gouscoude meus clevet alies lavaret ;
 Er bed man na neus quiet a vouir evurusdet.

Bezan e glac'harus vit eur vam hag on tad
Pa welont ho pugale ho tonned d'ho couitad ;
Maguet ho deus int bet gant teneridiguez,
Ha rei d'he ho c'honje dont er priedelez.

Breman daou zen yaouanc, c'hui a vo obliget
Da zonit d'ho c'honsoli queit ma vouint var ar bed.
C'houi a heus bed ive glac'har ha calounad
O tont da guimiadi eus ho mam hag ho tad.

Ho kalon so bet treuzet gant ar glac'har
Ho lavaret kenavo ha do preur ha do c'hoar,
Berde oac'h assambles neun union barfet,
Hag en nos hag en de, c'houi so en em garet.

Gant ho bolonte vad e zoc'h nem separet.
Ha cetu c'houi breman unisset d'eur pried.
Kenavo tad ha mam, breudeur ha c'hoarezet,
Me ha ya da zel'chel menaj gant ma fried.

Ar briedeles ha kaera tra so er bed,
Gant Doue he unan e bet etablisset,
Pa oa krouet Adam gant krouer ar bed-man,
E neus roet Eva evit pried dezan.

Rag se, daou zen yaouank, kemeret confianç.
Ha Doue a rei d'ac'h prosperite ha chanc,
Ha nem garet bepred gant guir fidelite,
Savit ho pugale en carante Doue,
Ha pa zeui ar maro do separi ho taou,
Graç d'ac'h da nem gavet assambles en envou.

LENEINDRE.

(*Propriété de l'éditeur*)

KERIVINE.